

# CHANSON

AR

## SEIZ SQIENT NATUREL.

*Voar eun ton agreabl.*

Apollon, Mercurius, Venus ha Jupiter,  
C'houi a delc'h var an douar an amitie sincer,  
Hac a ra d'an dud yaouanq en em garet parfet,  
Prestet d'in hoc'h asistanç, me ho ped, eur momet.

Sperejo celestiel, astro ar firmamant,  
Me a deu d'hoc'h implori, gand eur galon ardant,  
Da rei an talanchou a bere m'eus ezom  
D'espliquan ar propojo arretet em c'halon.

Abostolet evurus, hanvet an Ebestel,  
D'hui a ro instruction d'ar gristenien fidel,  
Pa'n oc'h choaset gant Doue 'vit prezeg ar lezen,  
Chilaouet he grouadur, exaucet va feden.

Rouanez an amitie, princes ar yaouanqis,  
Moises a Jeremi, chefo deus an llis,  
Ha c'houi, carante dener, zourcen an deliço,  
Deus a gomso eloquant ramplisset ma gueno.

Ne c'houlenan get antren 'bars en theologi,  
Na mont da guemer affer ous an dud a studi;  
Ar belec, an arc'hescop hac an den a bluen  
Ne garfent quet'no enor divanqan an asen.



Breman c'houlenan avis an autoriteo ,  
'Vit n'o devo get a lec'h da reproch ma c'homso ,  
Hag evit cavet repos da furchal ma speret ,  
Ec'h an d'antren en ilis, lec'h on bet badeet.

Patronez ar barous-man , ma c'harante divin ,  
Prosternet on dira-z-oc'h var beno ma daoulin ,  
Juntet ganin ma daon zorn , digor ma daoulagad ,  
O sellet irezeg an env da c'houlen ar mennad.

Guir Vad an Tad Eternel , ma salver admirabl ,  
Me so deut d'hoc'h adori beteg ho tabernacl ;  
Disquennet , mar plij guenac'h , eur sell a drugare  
Var an hini disteran dimeus ho pugale.

Me a so un den yaouanq zavand ha dizourci ,  
'Boue an oad a daouzec vloa on poursu ma studi ,  
Am eus e'hoant da discleria ma bue malerus ,  
Mar manqan dre ignoraç , a c'houlenan excus.

Me ho suppli , Genitor , mestr ar scrivagnerien ,  
Croguet breman bars em dorn , conduet ma fluen ,  
Ha c'houi , tad ar sclerigen , poset var ma speret ,  
'Vit ma scrivin pen-da-ben ma buez dremenet.

Mar'm ije bet un talant 'vel en defoa sant Paul ,  
Hag eur voes qen agreabl evel eur rossignol ,  
Da riman eur son nevez , me laqje ma speret ,  
En enor d'am mestres coant , ma guir vuan caret.

Mes me a c'houlen faveur quent 'vit commanç ganti ,  
Rouanes an oll ele haç hini ar Messi ,  
Ar seiz sqient naturel hac ar seiz planeden ,  
Da rei d'in o ajistanc da boursu ma reglen.

Me'm eus choaset 'vit mestres fleuren ar yaouanquis  
Brillantoc'h evit ar ros ha 'vid ar fourdelis ,  
Agreaploc'h da barlant 'vid an ele memes ;  
Gredan get a man he far 'bars er rouantelez.



Quantan 'moa bet an enor da velet ma mestres  
A oa en pardon san Min, gand he c'hamaradez;  
O vale hag o bourmen evit he fasselans,  
Eno e defoa piqet ma c'halon gant eul lanç.

D'ar c'houlse me oa yaouanq o commanç studiant  
O boursu ma avantur mesq a re zavantan;  
Ma c'horf a vije er scol, mes allas! ma speret  
Gand ar bouquet florissant a vije occupet.

Demeus an oll scolarien, me oa en assuranç,  
Ar c'hentant, ha goude se ne oan qet 'vit avanç.  
Ha me o sonjal, un de, monet beteg he zi,  
Gand eur galond languissant da velet anezi.

Me o salud, merc'h yaouanq, objet ma c'harante,  
Me a so deut d'ho cavet an devez a hirie  
Vit laqad un tam amser, mar be d'ho fantasie,  
Da gontan d'ac'h ma doare ha clevet ho hini.

Den yaouanq, leun a furnez, me ho salud ive,  
'Vel m'en defoa gret goejall ar Sænt hac en Æle  
Pere ie voar an daolin dirag ar Messias  
Var lein mene Calver pa oa 'touguen he groas.

Ober ret d'in un enor hag a so agreabl,  
Gand ho comso familier hag ho bolonte vad;  
C'houi eo an hini garan muan, en assuranç,  
Nemet de Zoue bebqen ne rofen preferanç.

Sellet Roue on envo en eur gadoar voen,  
Var lein mene Sinai, o scrivan he lesen,  
Dre behini e tifen ous e oll vugale  
Donet d'en em draissan an eil hag eguile.

Me lar d'ac'h en guirione aman, ma servijer,  
Oc'h eus goneet ma c'halon dre gomso saluter,  
Ha, pa gaffen mab eur prinç, evel ne gavin qet,  
Ne desirant nemedoc'h 'vit beant ma fried.



Ho propojo ravissant a blij d'in , ma mestres ,  
Ha rejouiss ma c'halon , ma n'oc'h qet traïtoures ,  
C'houlenan netra dianac'h , qu'en evid ho quittât ,  
Evit ar veaj quantan , 'met bean'n ho craç vad.

Arsa 'ta , ma servijer , couls eo dimp finassan ,  
Me a deu da laret d'ac'h quen a vo ar c'hentan ,  
Ous ho pidi da retorn hep dalet d'am guelet ,  
Ma graç vad a vo ganac'h partout lec'h mac'h efet.

'Vid an eil guech , a gredan , me o mont da vale ,  
Gand eur speret qen contant 'vel hini an Æle ,  
Da velet ma mestres coant , rouanes ma c'halon ,  
Hini'n deus ma ramplisset a gonsolation.

Bonjour ha joa , ma mestres , rouanes ar fleurio ,  
A guement so bet biscoas plantet ebars er vro ,  
Brillantoc'h evit an heaul , scleroc'h evit al loar ,  
Puissantan merc'h yaouanq a so voar an douar.

Me a garje bean bet eloqanç Ciceron ,  
Pe autramant ar furnes en defoa Salomon ,  
Eur guenau gret en arc'hant hag un teaud alaouret ,  
Da barlant en ho presanç evel ma veritet.

Pa'z oc'h deut beteg aman dre garante parfet ,  
Me a rent d'ac'h ar salud gant enor ha respet ;  
'Mije gouvret er feçon hag an tu da barlant ,  
A vije ma brassan joa plijout d'ho sentimant.

Mes me so eur plac'h yaouanq 'neus ar speret dister ,  
N'en on qet bet studiet 'veldoc'h , ma servijer ,  
C'houi a oar scrivan ha len ha me n'hen ouzon qet ,  
N'allan qet coms eveldoc'h , rac se ma escuset.

Ma mestres , c'houi so furoc'h evid ar Salomon .  
Ma vije permetet d'in digor d'ac'h ma c'halon ,  
C'houi'n ije guelet enni gravet an amitie  
Hini am eus evidoc'h gant guir humilite.



Ma qeret , a vemp hon daou unisset assembles ,  
Evel ma oa sant Joseph hag hon Mam ar Verc'hes :  
Mar-g-allan ho posedi un de var an douar ,  
Me a vezo qen jaoüs 'vel un Æle er gloar.

Me a so eur femelen dister a galite ,  
N'on qet ingal'n ho qenver en mado , en ligne ,  
Mes mar-g-eo predestinet gant Doue eternal ,  
A vemp hon daou unisset , ne c'houlenant qet voel.

C'houi eo fleuren ar merc'hed a guement so'r c'hanton  
Chilaouet , mar plij genac'h me ho ped , a galon  
Moes an hini disteran deus ho servijerien ,  
A c'houlen eur mouchouer pe eun dabatieren.

Evid merq a amitie , ma servijer fidel ,  
Ez an da glasq an alchoe da dieri'n armel ,  
Hag a vije ma c'halon ho piye goulenet ,  
Ma vije pccsub he rei'm oa qet ho refuset.

Tostaet aman , me ho ped breman , ma servijer ,  
Cetu aman var an daol pevarzec mouchouer ,  
Ha peder dabatieren olifant zulaouret ,  
A choas a so evidoc'h , hag ouspen , ma qeret.

Me ielo breman d'ar guer gand eur galon contant  
Pa'm eus guelet , ma mestres , o carante ardant ;  
Ha , mar partaget ganin lod deus hoc'h amitie ,  
Me a respeto anoc'h en durant d'am bue.

Qen vo'ta , cloarec yaouanq ha ma brassant mignon ,  
Hoc'h aviso eloqant a raviss ma c'halon ;  
Deus a guement den yaouanq'n eus ma darempredet ,  
N'em eus caret nemedoc'h boe m'oc'h deut dam guelet.

Ma mestres so'r plac'h yaouanq hag e deus blev melen  
Ha daoulagad qen ardant evel div stereden ;  
Hannes en deus ar pouar , gant he selo mignon ,  
Da rei d'he muan caret ar recreation.



Salud d'ac'h , ma mestres coant , gand enor ha respect  
Me so deut beteg ho ti gant eur galon barfet ,  
Evel ma oa gouejal ar profet Daniel  
Bete dor ar barados da barlant ous an Æl ;

Dre gommandamant Doue evit goulen ar c'hraç  
Da vevan en he repos ebars un hermitaj ;  
Mes , allas ! me so un den a so bas a speret ,  
N'on qet capab da barlant evel ar profedet .

Me ho ped , ma servijer , cesset ho complimant ,  
Ho tiscourio admirabl hag ho comso charmant ;  
Rac pa sonjant em speret er pes em eus clevet ,  
Pa neverd hoc'h ajistanc me'm moa disesperet .

Me a lar d'ac'h , ma mestres , leun a gonfusion  
C'houi 'moa laqet porcheres var doul dor ma c'halon ,  
Hag ouspen se an alc'houe var ma oll secrejo  
Ne garan hini 'merdoc'h a guement so er vro .

N'oufa'h bigen , ma mignon , me a lar d'ac'h aman  
Caroud anon , a-dra-sur , muoc'h 'vit n'ho caran ;  
Couscoude gant ma c'herent me a so difennet ,  
Dre ma eo bet ar goal-deaud o prezeq'n hoc'h enep .

Quelo trist ha effroyabl , grevus direzon ,  
Te a bland c'hleve noas 'bars en creis ma c'halon  
Eur vatimant am oa gret hag a so dispennet ,  
Birviquen var an douar ne repos ma speret !

O Majeste infinit , ma Doue , ma c'hrouer ,  
Diganac'h a c'houlenan ar c'hraç particulier !  
An ners hag ar puissanç rojac'h d'an intanvez ,  
Da distrujan gand he dorn roue Holophernes .

C'hoas a c'houlenan ouspen , qis un den a verit ,  
Oll dalancho ar profet hag ar roue David ,  
'Vel m'en defoa gret goejall , qent disqen d'ar blenen ,  
An Empereur Bonapart hag he officerien .



M'amije bet ar pouar hag ive ar buissanç,  
Evel'n defoa sant Louis, pa oa roue en Franc,  
D'exilan ar goal-deaudo deus ar rouantelez,  
Em ije gret an hanter deus ma silvidigues.

Lennet ar scripture santel, me ho ped, ma mestres,  
Hog a caffet rapportet, var levr ar furnes,  
An neb a gred goal-deaudo, so diavis ha foll;  
N'eman qet var an douar an hini blij d'an oll.

Maleureus eo an hini a so var an douar;  
Mar deu dean nep feçon da goean 'no fouar;  
Ha, sioas! qazi an oll, abred pe divezat,  
En peb amser eo stignet ar pecho miserab.

Ar Pab en he gathedral, ar Roue var he dron,  
An avocat 'ne studi, ar beleg o sarmon,  
Hag ar barner aseet qichen he dribunal  
So sujet d'ar goal-deaudo qencouls 'vel ar re all.

Breman gredan parfet ar pes am eus lennet  
En eul levr ancien gret gant ar brofedet,  
Eo qen difficil bevan divlam var an douar  
'Vel mont da fonç ar mor bras ha retorn var ar bar.

Pa dei messajer Doue da draouien Josaphat,  
Da separi ar re fall deus a vesq ar re vad,  
Vo guelet ar goal-deaudo dirac an assamble  
O vont da dan an ifer 'vid eun eternite.

Evit derc'hel ar sermant am oa gre, ma mestres,  
Divezan'm oam bet'n enor da barlant assambles,  
Ez on deut d'ho saludi gant guir fidelite,  
Mes he c'houlenan netra enep d'o bolonte.

Arretet ho propojo breman, ma c'hamarad,  
Lampâd a ra ma c'halon birvi a ra ma goad,  
Hag evid approuvi d'ac'h m'amitie'n hoc'h andret,  
Ma qeret, ez int ganac'h el lec'h ma tizirfet.



Gret reflexion var se , me ho ped , ma mestres ,  
Ma'm be ho casset ganin en qis eun esclaves ,  
Ha donet d'hoc'h eureuji hep conge ho ligne ;  
Se a ve reprochap d'in en durant ma bue.

Mes confortet ho calon , marteze gand amser ,  
A dremeno o fulor ha teri o c'heler ;  
Hag a veomp unisset gant o c'honsantamant.  
He c'halon oa qer mantret qen n'alle qet parlant !

Malheur 'vid an den yaouanq ne lezer anean  
Da demezi p'en deus c'hoant , d'an hini blij dean !  
Distrempet oa an douar eno gant hon dæro ,  
Qen a boullade an dour da gargan hon boto !

Me a deu d'ho suplian , tud yaouanq ar c'hontre ,  
D'unissan ho calono assembles gand hon re ,  
Me'n efoa cun ha glac'har o quittât ma mestres ;  
Qeit ma vin var an douar n'he ancoain james.

Mes Doue a lavar d'imp ebars er scritur sacr :  
Troc'han a refet torn ha tennan ho lagad :  
Gueloc'h eo mont gand un dorn d'ar joaio evurus ,  
Evit n'en deo mont gant daou d'ar flammou malerus.

He zad a lavaras d'in : cetu aman 'l lizer ,  
Pehini 'm eus recevet digand ar messenger ,  
Hag em eus commission da rei anean d'ac'h ;  
Leqet-an en ho codel ha qesset-an guanac'h.

Sclerijen an oll astro , te so hanvet al loar ,  
Disqen ebars em c'halon ha disec'h ma glac'har ,  
Mar permet ma doaulagad arreti ma daero  
Da rapporti eur guentel enep d'ar goal-deaudo.

Te'n efoa roet avis , teaud brutal ha funest ,  
D'hon tad ha d'hon mam qentan , er barados terrest ,  
Da dibri demeus ar freus difennet gant Doue ,  
Se so qiriec d'hon miser ha d'hon oll baourante.



Bars en prison Pharaon te en defoa plantet  
Joseph, ar santelan den deus ar patriarchet,  
Pa oa bet faos accuset gant pried Putiphar;  
'Boe ma eo crouet ar bed ec'h oud voar an douar.

Te attaq an dud yaouanq memes var o enor  
Gand eur voues qen eclatant a ia beteg ar mor,  
A deu da lemel diante un tensor excelant,  
Preciussoc'h 'vit an aour hag evit an arc'hant.

Abalamour d'he ligne ec'h espernin Judas,  
Hag avanç 'bars histoar betec Herodias  
Pini gonseillas he merc'h, dre un avis traitour,  
Da c'houlén var un assiet pen sant Ian-Vadezour.

Lar d'in, teaud milliguet, ma n'en oud qet contant  
Bean guerset Map Doue ha dibenet eur sant;  
P'ach oud en 'pad an amser o clasq dont da laqâd  
Ar mein-be var an douar da ruan gant ar goad.

Ne bad pelloc'h ma c'halon da brezec varnean  
Pardon ha misericord a c'houlénan 'vitan,  
M'en defo cun ha glac'har dimeus he bec'hejo,  
Ha m'an em gonvertisso bete fin he zeio.

P'antreis em c'habinet gant desolation  
En sell da gavet un dra a gonsolation;  
Ac'h is da len a lizer am boa bet diant he zad,  
Pa digoris anean, m'en defoa calonat.

Ma c'halon so glac'haret, ma Doue, pa sonjan  
Bet on welet ma mestres 'vid ar voech divezan  
Roët eo d'in m' c'honjet scrivet var baper goen,  
Ma c'houitanç en general d'he dilesel a gren.

Me oa tri de a taer noz hep dibri nag evan  
Na qen nebeut hep repos : na rent nemet goëlan,  
Dre ma renqen separi, hep bean meritet,  
Deus fidelan merc'h yaouanq anavan var ar bed.



An dried de a scrivas qelo d'he c'hamarat,  
Ha me res dezi respont divar lizer he zad :  
Prononcet eo an arret enep d'ho serviger,  
C'houi iel breman d'ar gouent ha me chomo er guer.

Pa oan ebars ma studi o len ma levrio,  
Ma welet quazi maquet, beuet gant an daëro,  
E renquis o dilezel ha mont da pazeal ;  
Ha me gemer ma fusuil 'vit mont da chasseal.

Arri 'bars en creis ar c'hoat me oa fatig bras,  
Ha me da guemer repos eno var ar yeot glas.  
Hag evel eur vadalen, commanç da deplori,  
Ne oa med Doue hepquen capabl d'am c'honsoli.

En creis ma brassan glac'har o sonjal em mestres  
Qazi 'vel dre eur miracl a velis eun heies,  
En em strinquas d'am daoulin evit ma saludi,  
Inspiret a beurs Doue da dont d'am c'honsoli.

Me ho ped, galand yaouanq, arretet ho taëro,  
Ha leget ho confianç en crouer an envo :  
Doue a'n eus ar pouar da gonsoli an oll,  
Da neb a fio ennan na'n ei james da goll.

C'houi a so var an douar 'bars en displijadur,  
Noc'h eus defot a netra, ma queret bean fur,  
Ha me ha so ho vevanch ebars er foreso,  
Hag a guemer plijadur da usan ma deio.

Eno e colis memoar, deus ma mestres fidel,  
Ha credi n'oamp get choaset gant Doue eternal  
'Vit bean var an douar assembles unisset ;  
Graç d'imp da vean eun de en pales an Drindet.

Neuze retornis d'ar guer 'vel pa'm ije nijet,  
Toman re ma goad ouzin, ne santen get querzet ;  
Ma speret a oa qen scanv, ma c'halon qen joaüs,  
Evel mac'h eo bars en env an Æle evurus.



Mar boe goejall ma c'halon carguet a disesper,  
Breman me so qen ezet evel eun ec'houeder.  
Pini ia beteg an env ha retorn d'an douar ;  
Adieu laran d'an tourmant, achu eo ma glac'har.

Madelez oll-buissant, roue an oll Æle,  
Me rent d'ac'h presantamant graço a drugare,  
P'oc'h eus roet din ar c'hraç, roue ar firmamant,  
Da finissan ma chanson joaüs ha triumphant.

Homan so eur son nevet rimet ha composet  
Gant eur scrivagnier yaouanq dimeus a Lanrodec,  
So ganet ebars er bloa mil eiz cant hag ugent,  
De diaroc goel ar Verc'hes a ve 'bars en Avant,

Ha 'vid esplican he noad d'an oll dud ignorant,  
Tri mis ha pevar ugent en tu all da daou c'hant :  
Ebars en canton Plouagat eo ganet ha maguet,  
Hag he hano scrivet mad so GILLES MORDELLET.


Mar 'm eus drouc-laret netra gant ma fragilite,  
C'houlennan escus ous an dud ha pardon ous Doue,  
Hag ouspen a tisiran da guemend he c'hlevo  
Ar boneur da jouissan deus a c'hloar an Envo.

FIN.



Mar doe goejall ma c'halon earguet a chespede  
Bremen me so den exot evel eun ec'houder.  
Pini ia beleq an eny ha retorn d'm dour;  
Adieu laran d'an tourmant, abun eo m'aglac'han.

Modeler oll-bussant  
Me tent d'ac'  
P'oc' h' eus re  
Da fuisan



Homan so o  
Gant eur so  
So gant e  
De diroc

Ha' vid eap  
Tri mis ba  
Ebars en c  
Hag he han

Mar m'cos  
C'houenn  
Hag ouap  
Ar bouen

REVUE